

DIHUNAMB !

BRETONED ...



Aùél-é-dran, damb hardih mat
Eañn get hon hent, eit Breih karet.
En tréh ne za'meit dré argad ;
Doué ne ra gopr d'en dén diskret.

DIHUNAMB!

DASTUMADEN MIZIEK

Saütet get Loeiz Herrieu hag A. Mellag, ér blé 1905

KRENNAD :

L. HERRIEU : Stad Dihunamb er blé-man. — P. L. : Bro ha broadeleh. — Triadenneu ag en Iuerhon. — AUÉLMOR : En touieu-tan (guerz). — Meinglé er brehoneg. — Lévreu neùé : Nome-noe-oe, get J. Riou. — Dihustelleu. — Treuigeu kleuet. — Aveit hoarhet. — D. : Disul, goudé er gospéreu (Soñnen). — PIER TUAL : Boked Mammig. — A glei hag a zeheu. — Énep d'ur hleñued-red. — Kamdro en Ankeu.

ER BLÉAD	{	Eit Breih	12 lur.
		Eit Bro Frans	14 lur.
		Eit er broieu aral	18 lur.

UN NIVÉREN pemp real

Distao d'er vistr-skol, d'er soudarded ha d'er skolaerion.
mar gouennant.

Stagaden lénnegél DIHUNAMB. Miziek. Léh ma kavér obéreu en E. Héneu.

Er Bléad	{	Breih	10 l.
et lénnerion		Frans	13 l.
« Dihunamb »		Broieu aral	18 l.

Ne vo chanjet chomléléh erbet ma ne gasér 4 real demb
aveit péein er mizeu.

Burèu en dastumaden :

Kas ol er péh e sel DIHUNAMB d'en E. Loeiz Herrieu,
en Henbont (Bro Guéné). C/c. 241-28, Nantes.

PAUL LE DEAUT

deit é léh Candalh

4, bent Port-Loeiz, ar er hé, Henbont

E BRÉNO GENOH : avaleu-doar; avaleu chistr hag ava-leu-mir; piz bihan, hariko glas ha hantér-gran, kaol, gran, ha hoah...

E UERHO DEOH : hadaj, fresk ha sur, fostat a gement sord e zo, rad, sabl kregad, fusteu, plouz-to, ha hoah...

A pe iet de Henbont, kerhet de gonz dohton; un dén ag er vro é hag e gonz brehoneg.

BOMBARD - BINIEU

MUZIK A VREIH - PLADENNEU

G. OLLIVIAUX

4, ar er Bôve (étal en Hoaridi)

Pelgonzér : 4-21

EN ORIANT

PLANT AVALEU

Araok préneir hou plant, deit de uélet un dé,
Er ré e zesaùér eidoh ér Gerneuë.
Bout e zo fréh goudask, hag avaleu koutel,
Avaléu huek ha braù, tré de gaerat hou tuel !

POPINEG ER GERNEUÉ S^e KARADEG, HENBONT

A LA SIBERIENNE

G. WINTER, FEUOUR

14, RU ER FETAN, EN ORIANT



Kerhet de glah hou mimieu hag hou skerbeu d'en ti-sé.
Krohennenneu kaer Skungs hag Opposum; er ré e ia er
guellan doh guiskemant Breih.

Dillad gouianù heb ur bañnen
Ne jaojant ket doh ur goanten !

Kampennet bag aozet e vè kement sord « fourrure » get un dén
a vechér.

NE VERN

pesord remedeu e hues dobér

AVEIT EN DUD.

AVEIT EI LONNED

groeit prest-ha-kaer pé de gampen, revé papér hou
mèdesinour; gourizieu merhed, bugalé ha tud vrás;
mar fal deoh bout chervijet mat ha fonapl é ma daù
deoh monet de di

L. JOLIVET

Apotikér ag er Hetan Sklas

Ru Trottier, HENBONT

(En ti tostan d'en iliz, é lein er ru)

Kerhet a berl Dihunamb hag é veet degeméret mat

é ti CHEVASSU

Horlojour hag Orfèboar

Ar dachen Bisson ha ru er Fetan, en ORIANT

É kaveet horlojeu, montreu, ranjenneu a bep sord. Bi-
zeuiér kaer ha brageriseu aral. Boketeu-éred ha bep sord
bijouteri.

Tud ieuank kosté en Oriant kerhet d'en ti-sen de glah
hou treu éred : é nep tu ne veet chervijet kerkloas; é ti er-
bet ne gaveet kement de choé.

Lénnnerion ha lénnneréz Dihunamb e vou groeit anehè er guellan
degemér.

Hui hel monet a fians d'en ti-men : ér hornad bro abhé ne gavee'
marhadmatoh.

HOTEL TERMINUS

GUILLAS - ROY, Perhen

ADAL D'ER GAR VRAS

én Oriant

PELGONZÉR : 1-62

Er guellan predeu; en ézemant brasan

TUD EN TI E GONZ BREHONEG

L'Argus de la Presse

« E UËL KEMENT TRA »

Saùet ér blé 1879. Mar fal deoh gouiet petra larér ahanoù ér
gazeteu, pé mar klasket gout er péh e skriùér diar en dra-man-dra
tr bed abhé skriùet d'er renour : 27 rue Bergère, IX. Pariz. Peig.
Provence 16-14.

Kerbel de glab hou tillad de di E. HINGAND

28, ér Ru Neùé — HENBONT

Hui gavo ino pep sord dillad
eit goased, tud iouank bugale
Dillad groeit revé hou korv
Labour groeit mat
Kement sort dañné ag er hetan
er marhadmatan e fehé bout

En arben ag er uerh vras hon es é hellamb guerhein
marhadmatoh eit ne vern pé ti.

DILLAD LABOUR
deit ag en tiér guellas
« A. Lafont »
« Le Costaud »
« L'Inusable »
« Le Coitin Parien »
Dillad glaù « Torrilhon »

Tud a gosté Henbont!

Mar hues dobér a lezeuaj eit gobér drammeu d'en dud ha d'el loñned; a ourizieu énep d'er forsadur (hernie); a drew eit gobér ardro er vugale vihan; a suan goust huek hag a drew aveit em-néat p' em-gaerat; a lezeu énep d'er fal loñned; a remedeu loñned; a liù hag a drew eit en dillad, en tiér, er glustraj, eit ou liùein pé ou hampen, kerhet hardih mat de di

F. SIMON, Lezeuour-Gourizour

43, ru Trottier, HENBONT

un dén ag er vro, e oui brehoneg hag e rei deoh er guellan dege.
mér, en ur uerhein deoh pep tra guel marhad eit é lèh aral.

É TI-SÉ HOAH : Mar hues luneteu de brénein, diar papér ur
médesinour-deulagad; aveit gout ha dobér hues a luneten J.
SIMON, er mab, lunetour a vechér, arnodadet E. F. O. M., e vu-
zulo hou selleu eit nitra hag e arajo aben acu luneteu torvet. Br
guellan luneteu.

R. C. Lorient, n° 8155

D'EN HANU GET UR BANIG DEUR

D'ER GOUIANU ÉN HOU KAFÉ

KIRSCH BRETON
LOCHRIST

Glustraj

PRENEIN GLUSTRAJ nen dé ket
un hoari : Chonjet mat éraok prénein
Arlerh é vo dévéhat deoh en devout kē

Glustraj koed tiù

deit a di **E. HINGAND**, 28 ér ru Neùé, HENBONT
e zieliet kemér, rak men dint groeit mat, braù, hag achiù. A
gaost de gement-sen é mant ken istimet.

Koed ag er hetan : michérerion ag en dibab e vé dok
ou gobér.

Prenein ha guerhein e hramb glustreu koh diar er méz
hag obér é hramb getè glustreu aral.

EN APOTIKEREH KREIZ KER (Ti RENOULT, kent)

61, ru er Morbihan (ru en Iliz) ha ru des Colonies én ORIANT
dalhet get en E.

J. BELLEISSUE

APOTIKER AG ER HIETAN SKLAS A SKOL VRAS PARIZ
é kavér drammeu, lezeuaj, ha remedeu a bep sort eit en dud hag
el loñned. En dud a ziar er méz e ia gozik rah d'en ti-sé de glask
ou remedeu.

En Apotikér e oui konz brebbeoneg

I ÉK DE FERMEIN

Chaussures BOISSELIER

12, Rue er Felan, en ORIANT

6 Médalen eur. 3 Prim bras

Ti a flans
sauct ér blé 1881

EN TI LÉH MA KAVÉR ER MUIAN DE CHOÉJ
BOTEU-LÉR AG ER MOD NEUÉ.

BOUT E ZO A GEMENT SORD, A GEMENT LIU,
A GEMENT PRIZ E ZO, AVEIT GOAZED, MERHED,
BUGALÉ.

BOTEU-LÉR AVEIT EUREDEU HA LIDEU
Kampennet e vê en treid én ti
Komz e hrér brehoneg

IVET KIRSCH AG ER VRO

GROEIT GET KIGNEZ AG ER VRO

KIRSCH BARREAUX E LOCHRIST (Morbihan)



Spouëlin Elen er V.

Stad "DIHUNAMB" er blé-man

AOUDÉ el lordad bras, éh es 195 komenandour de Zihunamb ha ne hellant ket mui degemér en das-tumaden, én arben dehè bout ér broieu estrén, Frans dijap, ér holonieu pé prizoniet. Bléadeu er ré-zé e ouiambl diañnez dehè. Ar dro 3000 lur nebetoù hon es bet elsé er blé-man.

A dural, kollet hon es embanneu aveit 180 lur, én arben d'er henñerh bout haodet.

77 komenandour hon es kollet, dré er ré varù hag er ré en des rahuizet en dastumaden. Arlañné éh oè bet 73 é rein ou diléz.

83 komenandour neùé, ré iouank dreistol, e zo deit de gemér ou léh. Arlañné ne oè bet nameit 57.

A fet er mizeu, éh es bet dispignet 438 l. 35 bihannoh eget arlañné, ha degooéhet e zo genemb 239 lur muioh, grès de largant Breihiz gredus hag en des kaset, er blé-man. proveu druoh. Reveint trugarékeit !

Gellout e hreemb, er blé-man, rein arré un draig benak d'hor henlabourerion aveit ou digol, un tammig.

Hol lénnerion féal e hrei plijadur dehè gouiet é ma sonnoù eget biskoah hon dastumaden.

Grateit em boë derhel, a p'en doë torfeterion Pariz tennet er brezél-man arnomb; dalhet em es ha derhel e hran, kuit a girat er bléad èl men dé bet ret d'en darn vuian ag er gazeteu galleg obér.

Diazéet em boë dezoned hon dastumaden ar ampartiz ha larganté hor heneiled : n'em boë ket fariet. Guélet e hrér petra e talv en diazé !

En doéré-man e gaso, gout e hran, « kalon-losk » de « dudigeu e zo » hag e oè sonjet mat de uélet « Dihunamb »

é koéh, a p'ou dehè troeit kein ha labouret énep dehi, lod anehè. Ou belz mat em boë neoah penaos

Santig « Krev » n'es ket a vertu !...

Kompreñ e hreint marsé breman é hellamb forh és diovér anehè, ha nen dé ket ou spered strih nag ou goalmur e barrei doh boéh Breih a vout kleuet.

Rechomeint mouhet kehet ma hrei plijadur dehè, garhet én ou hunvréieu koh; reviligeint er bed neué e saù get otré en Eutru Doué. Didalvè e vo ou énebieh, hag a pe zivourdeint, é vo devéhat : groeit e vo el labour d'er ré ampart. Getè ind ne chomo nameit en despet bout fariet hag er véh bout klasket obér geu doh er nep e hra é zevér a gristén hag a Vreihad.

A vepred é ma bet else : doh un tu, er ré e labour aveit guellat stad er gevredigeh, ha doh en tu-ral en « éned » doñnikite, kavidellet ,un dehè ne vehè torret ur vah benak ag ou havidel aleuret.

Er ré getan hardih, gredus e gas er bed; er réral eunus, flau, diboén, en em-laosk de vout douget, èl léieu d'er marhad.

Nen don bet biskoah émesk er ré-man, na ne vein.

Derhel e hrein get me bom, kén hoant dein nameit dihuen guirieu Breih, hé Fé, hé ieh, hé spered broadel, ha laret er Uirioné.

Truhé em es doh er ré a me lénnerton — mar des hoah anehè — ha n'ou des ket komprennet n'em behè ket reit deu-ugent vlé a mem buhé, hepkén aveit deverral tudigeu beruel. Ihuéloh e oè me hoant. Goah d'er ré n'ou des ket klasket kén é Dihunamb. D'en dud-sé é jaoj ur hazeten gallek aveit bugalé...

Boulhamb enta ur bléad neué, get kalon, ha fiamb é Doué hag ér Sent en des saüt Breih. Ne zilézeint ket er vro e zo bet féal dehè. Un est e zo é scuel, didan ou bennoch, ha rezi e zo geton de vout kaer.

LOEIZ HERRIEU.

Lénnet mat

Nen dé ket 4 skouid e zelé er ré e zo achiù ou bléad a oudé dé ketan er blé, ha n'ou des ket hoah péet; met 4 skouid ha 10 blank, a p'ou des lézet kas papér dehè.

Bro ha broadeleh

IN AMZÉR treboulet é hon amzér-ni, ha liés é kleuamb komz ag er vro ha ag er vroadeleh. Er vro, petra é hi enta ? Er hornad doar lèh mah es ur ouen é viuein, a oudé kantvedeu. Met kement-se nen dé ket eroalh eit rein en hanù a vro d'u loden doar. Ret é d'ur vro kaout, ohpen, ur ouen hep rà a géjaj get en estrén. En dud e zelé eué en devout ur spered broadel, un istoér hag en ivoul de heuliein routeu ou hendadeu.

Breih en des ol er péh e faot aveit bout ur vro. Hé zud e zo bugalé er Vrehoned deit a Vreih-Veur épad er Vst ha VIst Kantved, didan goask er Saozon deit de lakat ou faù ar er hornad doar-sé. Hon hendadeu, feahet é brezélieu bras, e oè bet daù dehè tihein ha divroein.

Chetu penaos é ma gañnet hor Breihig-ni.

En ur zegoéh dré-man, saüt en des Breihiz ur goarnmant revé ou sévenadur ha goarnet, én ou bro neué, ou hustumeu koh. Dalhet ou des pen d'en diavézerion, épad hir amzér, rak ne vennent ket rein ou frankiz d'en estrén, na lezel ou hustumeu hag ou lézenneu de vonet de gol. En aheurtereh-sé hag e zoug en dud de zerhel pen d'en énebour, e vè groeit er spered broadel anehi.

Met er Vrettoned n'ou dehè ket bet dalhet ker pel kenevé d'ou ieh. Rak el lavar é e laka en difor brasan étré tud a vroie dishaval. Ag er ieh é ta er hem brasan; rak geti é vè goarantet modeu koh, spered er vro hag er sonj ag en amzér dreménet.

Hep ieh nen des ket a vroadeleh, en des laret un dén fur, hag er uirioné e oè geton. Pe gomz en dud a ziù vro en hevelep lavar, é tant embér de sonjal én hevelep feson ha d'en em-géjein aveit obér ur bobl hepkén.

Un dra aral e ra hoah ou broadeleh d'en dud e chom én hevelep bro : en Istoér. Get ou istoér é talhant sonj ag er boén ou des bet, ag er goëd ou des bet skuilhet, épad er brezélieu, aveit goarn ou frankiz ha chomel didrous de viuein, hep plegein d'en estrén. Er houn-sé e laka en dud ag en hevelep bro de gerhet dorn-oh-dorn ha de zerhel pen d'en éneberion. Ol en treu-sé : er mem goed beruidant é redek ér goahiad, en hevelep sévenadur, ur ieh haval, er sonj ag en trebilleu treménet, e laka ul liam étré en dud, ou unan hag e hra d'er garanté-vro kelidein é kaloneu en ol.

Hag er garanté-vro é e ra d'en ol ivoul d'adseuel ou broadeleh, mar da dehi koéh, pé de lakat ou bro é rank er ré binùikan ag er bed ha brudetan ar un dro.

Ni Bretoned, bout hon es ol er péh e hra a Vreih ur vro. Ag er memes gouen omb : hani Keltia; komz e hramp ur ieh ag er ré vraian; dishaval é hor spered hag hor sévenadur döh hani er broieu aral; poéniet hon es beta breman aveit dihuen et péh e zo demb ha bout hon es un istoér e hra inour demb.

Nen dé ket enta er hours de nahein ol en treu-sé. En eskem, labouramb startoh pé start aveit ma vo anzáuet hor guir de vont Breizh pen-kil-ha-troed ha d'implé er brennog èl hor ieh broadel.

P. L.

Triadenneu ag en Iuerhon

(IX^e Kantved)

En tri zra tenaùan hag e zah neoah er bed ar é saù : en nedennig leah e strimp a vron er vuoh; er gelidennig guenih e strimp ér méz ag en doar; un nedennig moén étré bizedur ur voéz dornet mat.

Tri skuir a fallanté mabden : un dén iouank é hoapat unan koh; ur hriù é hoapat ur mahagned; un dén fur é hoapat ur fol.

Tèr fulen e éntan er garanté : un drem; un très kaer; ur gomz.

Tri zra e vè randon get un dén ou haout : ur voéz koant; ur jao mat; ur hi herrus.

Tri zra e gas ur hornad de gol : ur mestr dinerh; ur barnour direih; ur fal vèle.

Tri zra bourdus de uélet : un dén kounaret; un dén noueus; un dén pih.

Tri zra e zisko é vèr fal zesaùet : Chomel rè bel é ti en dud; sellet é kement léh e zo; aters hep déhan.

Tri pilet hag e splann ne vern é peh tioéléd : er uirionné; er spered; er ouiegeh.

Tri zra e barra doh un dén a zioal : en ivaj; rè a fiãs; er garanté.

En tri zra guellan eit mestr ur vro : reihted; peuh; ul lu.

En tri zra fallan eit mestr ur vro : lizidanted; treise-reh; ur fal aljour.

(Revé troideg O. JIGOUZEU)

En tourieu-tan

NOZ é ar er mézeu, kousket é Breih-Izél.
Ne gleuér 'meit er gué é krénein én aùél,
Hag er mor é hadal èl ul lon kounaret.
Tioél é en amzér : loéf na stiren erbet.

Ar aodeu Breih-Izél é huélér tourieu-tan,
É splannein lugernus ar er mor, barh en néan;
É tiskoein d'er bageu en hent mat ou haso
Duhont, azoh er méz, bet er porh pe faoto.

Ha doh troed pep tour-tan, er mor za de lipat,
Eit en turel d'en dias, met en tour e zalh mat.
A houlen de houlen, er sklérédér, ér safar,
E ia bet er bageu, én aùél é kounar.

Avel en toutieu-tan groamb-ni eùé, bredér;
Ha labouramb bamdé ar er méz èl é kér.
En hor goahiad goed gredus e red, kenvroiz
Lakamb enta sklerédér é spered er Vreihiz !

AUÉLMOR.



Meinglé er brehoneg

GIRIEU IMPLÉET GET ER BOBL

paué-ieu (s. m.) : pleg goarnet én un tam dillad aveit er brasat devéhatoh.

kantifaren-neu (s. f.) : conte à dormir debout.

adùeh (distroein en) : retourner.

taou ! taou ! : toc - toc !

spurmant-eu (s. m.) : apparition.

(Dastumet get L. H.)



Lévreu koh — Lévreu neué

JAKEZ RIOU : *Nomenoe-oe.* — Skeudenn P. Perron — « Skrid ha Skeudenn » — Brest. (50 lur).

Ur péh-hoari fentus, bourus de lénn, bourus de sellet, get skeudennet lan a spered. Ur lévr e hra inour d'er skrivagnour, en des ean skrivet; d'en arzour en des ean skeudennet ha d'ær mollour en des ean mollet, nameit é vehè gellet, marsé, temal de hennen bout chomet rē bel hep stuein é lettrad, dallet get el liù. Diar ul lévr ag er briz-man é hellér chipotal !

A zanué el lévr, petra laret ? nameit é hrei plijadur de gement Breihad el lénn. Kavet e hrér abarh taolenneus, liuet dru, meur a uéh, diar stad spered er Vretoned é amzér Nevénoé.. ha bremen.

Nevénoé ! Emgann Ballon ! Bniñ dijabet a graban er Franked ha sañet de roualech ! Péh doéré kaerh aveit Breihiz en amzér-sé ? Sant Kenueien é klask obér un degemér kaer de Dad er Vro ha d'é soudarded, goudé ou deueh klosus, get Redoniz hag er bei-zanied ag en dro, pé hoant reihoh ?

Met foér ha marhad e zo en dé-sé, ha ret é ou farrat, aveit ma vo dijab er plasenneu. Hag en dud de sœul énep d'er gemen.

Nevénoé ! Più é henneh, hag e talv muioh eget foér ha marhad ? Er vroadeleh ? Nag er vuoh, er pennoh, en ebel, en uieu, er berhellie e zo de uechein ?

Ha nen dé ket er respont e zo bet reit bepred ,d'er foëterion-hent mah omb ?

Hag é huélamb, é taolenneu bourdus, met lan a furneh, stad spered en dud-sé hag e zo troeit ou halon de vout ur iah karnet, hag ou spered de vout ur boelleu... Stank int hoah hiziù en dé, émesk tud a bep stad.

Trugaré Doué, é ma azé en éned disoussi hag e gan kloñ er vro, ha kloñ Nevénoé, hep klask gounid argant. Hag er haeh Nevénoé, er gouron hep é bar, ret dehon donet de gér Redon, ar droed, é unan pen, mieu men dé é soudarded hag é ofiserion ! ! !

D'er foëterion-hent, d'er geih, é ra en obérour karg de gañnal, ar un dro get en éned, kloñer er vro, hé nerh, hé braüité.

Kenevé d'en dud « izél » ne vehè ket disohet Nevénoé get é benzad : er beizanted, nezé èl bremen, en doë seud prest d'alein; er bitaoded, madeu hag iehed de zialo !... « Danvez a zo alies paourentez » e lar en obénour dré heneu en Auen.

Nag a dud « peur » e zo atañ ar zoar pinùik Breih-Izél !

Kentélieu a bep sord e gavér kuñet didam riotereh ha bégadeu farsus er péh-man hag e zegas ké d'er brehonegour m'é ma marù ken abret Jakez Riou, ken pinùik é faltazi ha ken héson é vrehoneg, a pe garé.

L. HERRIEU.

DIHUSTELLEU

Me zo guen ar velén hag é teusk mem blèu é kuhan er péh zo présiusan ar en doar. Ar un tnoed é ven bepred, pe ven ar saù, get mem bredér. Pep plé men diskarér, men goaldretér, me filér. Hag a pen don bréuet d'en taoleu, n'en des na fin na fol ne glask ar me lenh, hamdé. Petra on mé ?

Respont : *Un doézen pé tolhiaden.*

DIHUSTELLEU ARAL

I. — Peré en tri zra diésan d'obér aveit un dén ?
II. — Deu veg beg-oh-beg, seih troed hag ul lost ?

ER BOULOM UISANT.

Treujeu kleuet

*Ne vank ket nitra,
'Meit kaoh-ki ha bara !*

*N'hé des ket kalz a huen
El leu ou dèbr aben !*

*Me ouiè-mé, eroalh, nen dè ket mat geton.
N'en doë ket lipet é skudel anehon !*

*Léañnez a beder botéz,
Ha, hoah, hañni vât n'hé des !*

(Dastumet get er BOULOM UISANT).

Aveit hoarhet

Biz-Krom e zo bet arrestet, un noz, get me iondr-korden é kuñet én ur vagon é gar Lanndeven. Kaset é bet dirak er barnour.

ER BARNOUR : « Petra hréh hui é vagon-sé ?

BIZ-KROM : Éh oen é hortoz en dé, Eutru,

ER BARNOUR : Na d'en dé, petra hret hui ?

BIZ-KROM : Gortoz en noz de zonet ! »

Soñnen neué

DISUL, GOUDÉ ER GOSPEREU

DISKAN

- Disul, goudé er gospereu,
Éh oè bouapl ér Hroéz-Henteu !
- I — Paotred faro, plahed iouank,
E oè éno, stankoh pé stank.
- II — Azéet ar lein ur varrik,
Unan e gasè er muzik.
- III — Guélet e hrér treid ha diùhar
É seùel, é foëtal en doar.
- IV — « Er vuhé ne bad ket bepred;
Get er horol ne skuihér ket.
- V — É fringal, hon.es plijadur;
Gouiamb cheleu doh hon natur.
- VI — Hoari, soñner, hep klask diskuéh,
Beta ma vo, arnomb-ni, béh.
- VII — Kogus du-hel, èl plu er vran,
E lar é vo, kent pel, harnan !
- VIII — Fichamb ataù, a sailligeu;
Diskoamb é ma skamù hor boteu.
- IX — Mat é ma vo guìù hor buhé,
D'er sul, kerklous èl d'er pamdé... »
- X — Kerhet e hrè, hoah, er soñnen,
Pe zassonas un darhaden.
- XI — Un taol-gurun e oè koéhet;
Ha geton, ur plahig lahet.

DISKAN DEVÉHAN

Disul, goudé er gospereu,
Éh oè ouil bras ér Hroéz-Henteu !...

D.



Boked Mammig

Get Pier TUAL



EIT MAT e oè d'en anderù pe zegoéhas Job er Go ér gér a intermant é bried Nolùen. Goudé mé-ren, é ti er Harrour, groeit en doè é bémenteu. Ohpen kol en dud, é ma ret diahlhein. Tennet en doè papér-diskarg ag en argand reit, — ne ouiér ket petra e hel arriù, — aveit er bara, er hig, er charké, en toul. È porh er Person éh oè bet, kent donet ag er vorh, é rigein dehon en obideu hag er chervijeu. Vad en doè groeit dehon, ha d'é dad cùé, lomming guin flour ha komzeu a gonfort en Eutru Person. Ha deit e oè kentih de Gerlohen, é sonjal, pé, kentoh, hep sonjal é nitra. Èl ma ta, anehon é-unan, ul lon d'é greu.

Èl donet én ti, gourséet en doè én é lèh, é blein en daol hir, étal er fenestr, e oè hoah ar er varlen anehi er vouteillad lagout hag er uéren en doè chervijet de « baotr en Ankeu », goudé m'en doè cherret kory en hani marù.

N'en doè laret nitra de Janneton, en deùehouréz, e oè é vorohat dré en ti. Na hi, naket, n'hé doè kredet tennein parland dohton, get eun a greskat hoah é ankén. Divaniéret e oè, er peurkaeh !

É ben geton é zeuorn pañnet du, sonjal e hrè, breman... Seih vlé diméet, ha chomel intany de dregont vlé, get deu a vugalé ar é zivröh. Padern en doè pear blé ha Tangi, deu. Ne ouilé ket anehon, rak groeit en doè rah er péh e ouiè, tré ma oè bet é voéz ar hé marù-skanù. Met pounnéer é kavé neoah er groéz lakeit ar é ziskoë. Huanadein ha demand e hrè didan er samm.

« Chetu-mé cùé elkent, e laras Job er Go, tad Andreù, é tonet én ti, un tammig arlerh.

— Ha hui, skuih, suoalh, e eilgirias Janneton... Ia, kén 'meit poénieu ! Met petra e vo groeit !

— Hor goahl hon es ni ataù », émé Job, én ul lakat é benbah é harp er vouist-orloj, goudé en devout sellet doh é vab é ten doh é gohad. Ha ean kentih ardran er gredans de durel é vrageu, aveit lakat é zillad pamdéiek.

A pe zas a ziardran er gredans, poén vrás ar é vizied reut é klask boutonnein é hougen roched, éh oè en deùehouréz, é kreiz el leuren-di, éh obér ur béh get linsélieu ha krézieu de vont bugadet en dé arlerh.

« Janneton, émé ean dehi, ret e vo deoh cùé diforh ur hréz benak, ur vroh a ré Nolùen. Doué d'hé fardon, un tamm dillad a bep tra, de rein d'er ré beur, el m'éma er

mod, ma ne vo ket nuah ér bed aral. Petra e sonj deoh, Andréu ?

— Gout e hret guel cildonn, hou teu, petra zo mat de vout groeit ».

Ha Janneton, groeit dehi hé bêh, ha kaset d'er hardi, d'en em lakat de fourdellat er hrézieu ér bank tostan d'en oëled.

Diskoein e hrsas de Job, pen dé guir ne hrè Andréu gouzabl a nitra, diskoein e hrsas un hiviz, unan lién fin. Ne oë ket ag er ré neùean, met mat e oë hoah de vout douget, ha plijadur e hrehé de Vargeit, er beuréz, e oë bet, en noz kent, éh obér beill get Nolüen. Laret mat hé doë de Janneton lakat ur hréz dehi a kosté.

Er gambr, é pign doh tal er gredans vraù, en hani tacheu melén, taolet en doë Janneton mé d'ur vroh divord, unan koton du, hag e iehè avot eroalh de Vari, moéz er botour koed, é leh en hani melénet ha dibañnet er voulouz anehi hé doë guélet geti, er sulieu devéhan-man, én overen. Un alézon e vehè hé rein dehi, rak berrek é en treu geti, get hé ziad bugalé.

« Er ré boteu-man, Job, e laras Janneton, é tennein a zidan ur guélé, boteu neùé du, frieu moén ha tronset dehè, ou aséet em es. Fédam ! nen dint 'meit mat dein ! Mar ne hues ket saù dehè, men dén peur, obér e hrehen me zreuz geté er gouianù-man; aben nezé, ataù, é vo oët mat er ré e zo genein : sklosal e hrant goah eit ur goh iar é klask gor !

— Mar gellet obér geté, kaset ind genoh, e oë bet respond Job.

— Trugaré deoh, hou teu. N'ankoéhein ket ém fedenneu, na ne hrein, inéan Nolüen. Doué d'hé fardono. Ur voéz, ne oë ket guel eiti, na tu de vout. Er vechan !... Met petra vo groeit ! N'omb ket mestr domb, na d'hon tud. »

Hag é lakas a kosté er péh hé doë diforhet aveiti hag aveit er réral.

Azéet en doë Job er Go én tu aral d'en daol, a dal d'é baotr Andréu, e oë breman é zeuorn ar é zivorhed é sindein, get é zivreh, é gorr pounnér ha laosk, ha divarhet é zeulagad, é sellet én dro dehon, él un dén penveudet ne ouér ket émen é ma.

« Me feürkaeh paotr, ne hret ket mat chomel elsé de obér sonjeu ha de huanadein. Magein hou poén e hret, ha nitra kén; ret e vo deoh, me faotrig peur, ankoéhat, pé ataù, kemér arnoh hag en em-lakat de obér un dra benak aveit pellat er sonjeu du, ha lakat poén de viùein... él éraok !

— Biùein ? e respondas Andréu, én ur obér ur saù d'é ziskoé... Marù é, me zad, marù é, e laras ean hoah, é zeula-

gad éh obér tro en ti, él pe vehè bet é klask en inéan en devehè lakeit buhé énon... él éraok. »

Marù é. Hag ar un dro get inéan Nolüen éh oë oëit, haval e vehè bet, pep buhé ér méz ag en ti. Éh oë liù ha blaz er marù get en ol dreu.

Spleitenneu en orloj n'ou doë groeit tro erbet a oudé huanad devéhan mestréz Kerlohen. Arrestet e oent bet ar bedér eur hantér, en dé kent, ha chomet e oent ar en eur a varù Nolüen. Pladen melén en hoskellér e oë el ul lagad é sellet, get saeh, ardran er uéren.

Aketus e oë bet Janneton de zerhel biù en tan, tré ma oë bet er horv marù én ti. Met marù e oë eùé en tan, ha du en oëled.

Fondet e oë er guélieu, ou golhedadeu pel a-skreibill dohté. Ha stedeu guerhidi koed beuz er glustreu koéret e skrigné, haval doh dent melén chajelleu digig ur penn marù.

Marù é Nolüen ! Ha marù eùé Kerlohen !

« Me zad, petra vo ahanomb ni breman ? « Trelonkein e hrè Andréu é komz. Più... più e gredet hui e hellehè donet de zerhel Kerlohen ? Hé fermein e vo ret demb ataù, n'en des ket a laret, pen dé guir é ma marù, ha hañni mui de bennekat én ti. »

Stokein e hrsas Job é votéz get trezellen en daol... avait skarhein a zidandi er hi hag er hah, e oë trouz geté avait un tamam askorn... Marsé !

« Fermein e vo ret ! » Hiriset en doë neoah Job er Go, é kleuet er homzeu-sé.

Fermein en ti en doë prénet, get é bêhieu argand, armerhet dehon, unan-hag-unan ! Un ti-plouz e oë nezé. É glas é ma breman. Un estaj en dévehè bet karet lakat arnehon, guéh obér; met é voéz. Doué d'hé fardono eùé, en doë parreit... Fermein en doareu : park el Lanneg, braùan park er barrèz, a oudé m'en doë en digoret... Rein én tu d'un aral, d'un diavézour, de baliat ha de gardellat én dro de dreid plant tinér é bopineg hag e hrè évi de gement hañni e dre-ménè étalté. Guélet lakat é guerh, é saù-taol, loñned, benue-gér, ol er péh en doë prénet, a nebedigeu, aveit... Andréu !

Ur flemchen e zo eroalh anehi aveit loskein rah un est, ha kohad dispi ur mab aveit fouligahein deu-uigent vléad labour en tad !

Saùet en doë el labourér koh, én un taol, ha péget ar é vab, é zeulagad du, fal el luhen anehi didan ou malven-neu ledan ha louedet.

...Habaskat e hrsas de Job, hag azéet en doë éndro, pe

uélas é zeu zouaran é tonet, a her. én ti, aveit en em-lakat unan a bep tu d'ou zad.

Padern, harpet doh kosté klei é dad, e grogas de ouilal goustadik, èl p'en devehè komprenet un dra benak. Èn tu aral, Tangi, e oë geton, én è zorn, er bar loré en doë cherrett ar en asiedad deur beniget, e saùè ar vleinigeu é voteu, aveit asé obér « houpeula » ar zeulin é « deta », ha héjein e hrèr er bar loré dirak é fas.

« Teta, sellet... sellet 'ta, boked mammig ! Dein mé vo, ma ? »

Ou zad-koh, en hani e sellè. Naren doh er bar loré, met
dohtè, ou deu, rak, ou deu éh oent, é guirioné, boked ou
mam. Mar tennè Padern muioh d'é dad, Tangi, erhat, e oè
paotr er vam get é vlèu ar velén, é zijot stérennet get bré-
had eur hag en deu doullig en em-forjé én è zivougen pe
hoarhè : poltred é vam, pakret. Deu voked, deit mat hag
aléj biuèin getè, get kemér soursi anhé, èl plant iouank er
bopineg.

É kleuet é vugalé, sauet en doë eùé Andréù é ben, divagoriet, ha sellet e hrè dohtè, unan arlerh en eil; ur guenhoarh e ziboukas ar é zivéz.

« Me zad, e laras an een herra dig arlerh, goudé torchein é zeulagad get kein é zorn, me zad, mar karet monet de douchein er seu d'er gér ag er Prad-Moen, meiei mé de glask er hezeg de Brad er Pont.

— Me iei mé genoh, e laras Padern, get jourdoul, é krog é dorn é dad, ha hui me lakei ar gein Péchar.

— Mé eûé, mé monet eûé, kein jao bihan, e zadouillas Tangi.

— Ia, kerhet araok de rein boked mammig d'er de oarn; kerhet, menon ! »

Klouarou éh oë deit de vout deulegad Job er Go.
El mah ér méz, é taolas ur sel ar en eur, dré akustumans. Éh uélet éh oë arrestet, ean oeit ha rein lusk d'en

hoskellér ha dein buhé én « tik-tak », èl ma larè Tangi.
En deu voked glan ha divlam en doë stréuet frond ou

A glei hag a zeheu

RESPOND VICHY

Breizh e zo, hag e gred hoah é hel un dra benak a vad donet demb a bolitikerion Vichy, en dòë gouennet get er Maréchal Pétain rein d'hor bro un distér frankiz ha digor aboel dor er skolieu d'er brezhoneg.

Er Maréchal n'en des ket respontet; met é Vinistred en des groeit, en ur gas, muioh eget biskoah, diavézerion de vout kardigi de Vreih. Elsé, emsellour er skolieù én Oriant hag e oè ur Breihad gredus, e zo reit é lêh d'un dén-deit a Bariz. Er prefed e zo atañ diavézerion. Er méred a hanüer, diavézerion eûé, pé ofserion koh, pé frannasoned pé tud « huibet ».

Ur mestr-skol a Vreih, bet eil-ofisour épad er brezél ha groeit dehon é zevér ér hrogadeg startan, e zo bet galvet de vonet ér mez a Vreih: d'obér skol, aveit er hastiein bout brogarour. N'en des ket sentet èl just.

Er ministr J. Barthélémy, én é lévr neué Provinces, e skrìu : « Je m'opposerai à l'enseignement de la langue (bretonne) dans les écoles primaires. »

*A fed er gristenion, er skolieu e chom er péh mah oént aroak.
Mechal netra vo ret hoah aveit ma tigoro deulagad tudigeu e zo?*

M. I.

LA BRETAGNE

*e zo hanù ur hazeten pamdéiek neué sauet aveit dihuen guirieu
hor bro ha-rein en tu de Vreichiz d'anaouot Breih. Dobér ou des !*

En nivérenneun, hon es guélier beta bremen, e zisko en des hoant hor henvréder neué d'obér labour talvoudus. Chetu perak é laramb dehè : Chans vat ! Eurus omb é huëlet, aveit er uëngetan è Breih, us hazeten éh embann bamdé ur pennad è brehongeg. Engorto omb é tei sonj dehè è komzér brehongen èh è bro Guénéad hag è ma èr brehongeg-sé è ma bet saûer er haeran lévr ag en amzér-man.

D'er hazeten La Bretagne degemér mat enta é doareu Breih, léh
mah es labour aveit en ol Vreichiz a volonté vat.

J. H.

D'HOR HENLABOURERION

Embér é vo kaset d'hor henlabourerion ur garten e gaveint arnehi ou lod kenlabour. Gellout e hreint goulen ou argant pé nezé l'évreu de zibab émesk ré Lévrreg « Dihunamb »

KEVÉREREH ER SKOLIEU

Degas e hramb sonj d'er skolieu é vo reit primeu d'er ré anehè en do, épad er bléad skol, disket istoér Breih d'er vugalé ha groeit skol brehonek dehè. En nivéren getan é vo displéget petra zo d'obér.

TREMENVARU

Degoéhet é genemb doéré divourus marù unan ag hol lénnerion ha harperion féalan, en E. E. Er Galleu, person Nein, treménet, gozik en un taol, d'en oed a 60 vlé.

En E. Er Galleu e zo bet araok mestr-skol é Mourieg, kuré é Baden, é Sant-Iehann, én Ignél ha person é Sant-Louann Bubri. É kement léh en des dihuennet er brehoneg, get kalon, énep d'ardeu en dud amoet. É kement parréz en des reit harp de Zihunamb. Bro-garour gredus, skriù e hré, é Huèvrér devéhan, d'ur hansom ag en « 3 b. » :

« Rekis e vo d'er Vretoned dihun ha scuel ou boéh eit dihuen ou ieh, ou relijon, ou droëdeu. Allas ! nen dint ket stank er ré e houi digor ou deulagad, kompreñ hag obér; er geih tud n'anauant ket istoér ou bro : biskoah nen dè bet disket dehè. Disket e vezé dehè istoér er vro Gal, istoér er broieu aral. Ur vén ! »

Hol lénnerion e larou ur beden aveit inéan er Breihad mat-man obeit trema Doué.

L. H.

Brehoneg és

Enep d'ur hlenñued-red

Ur hlenñued-red e oè koéhet ar er vro. Ha tud e varùe geton. Kaset e oè bet papér d'er mér, é pep parréz, aveit laret dehon en em-gemér, cours eroalh, aveit bout prest de dalein d'er hlenñued.

Un dé, er prefed e oulennas get ur mér petra en doé grociet aveit kement-sé.

Hag er mér de respont, digas-kaer : « Groeit em es krouizein un toul, ér véred, aveit peb dén a me farréz. »

KAMDRO EN ANKEU

GET LOEIZ HERRIEU

12. — Monet e hramb d'Euilly. Béh hon es éh anaouout er park léh m'é ma er véred. Saüet e zo aharh kobafineu, groeit henteu, krouizet en doar.

En un toul, doh tor les « Creutes » durheit d'er hreisté, é ma « manér » en E. Gentil. Eno é vérennamb.

Pelured e zo deit geton a « bermision », Chetu tri blé n'em es ket tañoeit anehè. Èvet e hran, get jourdousl, en deur mor chomet énnè; deur mor a Vreih hag en des douget geton goust huck en aùel e huéh ar zoareu bras er Goh-kér. Guin-ardant chistr ag el Lokunél e zo deit geton eùé. Èh omb é kreiz « bureh » er vro ! Ar er brehoneg éh amb de getan, aveit komz ag er vignoned hon es duhont ha n'hom ankoéhat ket; met fonapl éh ér ar er galleg. El ma lar en E. Gentil, diés é d'er vélén kavet ou girieu, én arben dehè bout bet lakeit ar er galleg, ag en oed tinéran, ha bout groeit geton ol ou studi.

Meur a botarn e zo koéhet ar Euilly, a oudé er uéh aral éh on bet aman. Get obuseu blazus ou des tennet en déieu devéhan-man.

Bout e zo neoad tud disoudard hag e zahle de viuein aman !

Laret e hrér demb hizù penaos tud er « 61^e Division » hag e zo ama, n'en des ket, ur uéh hepken, fardet er méz ag ou zoulleu, a oudé pen ketan er brezé. Balé e hrant ag ur pen d'er pen aral ag en talva, kemér e hrant ou zro ér fozelieu, met ne oulennér ket muioh getè.

Ret é laret éh es ur politikour de ben anehè hag é ma er souarded ag er Hreisté !

Breihiz e goéh, en ou léh, a vileu adalek er Hreisnoz betag en Helvétia.

13. — Bamdé éh a lod a me zud kuit. Hiziù é ma tro er hias 1891 ; ré er blé 1897 e zo obeit de cherreh pililot. Ne chom mui ém hom-pagnoneh nameit un 60 dén benak !

Hirat e hra en nozheu ha hoar eroalh dein de gousket. Kargein e hran aben d'el lévreu e hellan kavet, aveit ankoéhat un tamig er vuhe drist-man. Lénnet em es *Le Dernier des Romanof*, lévr groeit énep de noblans er Rusia, hag e zisko éh oè koéhet izel mat en dudchentil duhont. Hag éh on breman ar *Mémoires de Mme Roland* diar en Dispah. É kement bro é ma haval abegeu en Dispah, haval eùé en dispaherion.

14. — Labourat e hra a zevri er « soudarded pililoterion ». A tro en dé é cherrant hoarnaj, orsal, bouisteu-hoarn goulé. Chetu tri blé é pad er brezé ha n'en des ket chonjet, araok hizù, a dolpein ol en treu-sé e gavér a stréu, a gargeu é kement léh ar en talva. Nag a vilioneu e vèh bet armerhet à pe vèh bet dastumet ol er péh e

vrein pé e vergl hed ha hed get er linenniu. Breman é ma devéhat aveit treu e zo. Nag a léraj, a zanùé, a hloafnaj kollet elsé ! Ataù ne vehent ket cherret er uéh-man : ankoéheit é ou lakat, hag en askorn eùé, ar er rol reit d'er billoterion...

15. — Hiziù é kasan d'er gér, de labourat, ur soudard ag er hlas 91. A Concreux é, ul lèu ahaneman. Ne ia geton nameit é zillad, èl un dén é monet é « permission ». Ha ne gaveet ket bikén de veban er hasér aveit bout disouardet ? De Boulogne-sur-Mer, me haech tud ! é sigur m'ê ma éno é « Dépôt ». Nen dé ket preest de zonet éndro, er peurkaeh. Bro er papérieu ! Léh e zo de ouélein...

Nag ur souéh aveidonn, en anderù-man, é huélet me heneil Blei Lann-Vaus é tegoéh aman ! Lakeit é ér G. B. C. er Holonial. Breman hor bo liés er blijadur d'en em-uélet. Ha bêh ar er brehoneg !

16. — Hénoah é ta en dudchent bélén Er Maréchal, Gentil ha Caubourdin de goélein genemb. Arlerh koén éh amb d'obér un ambroug dehè ar hent Beaurieux. Kun é goubaññel-noz. Blei e zispleg demb er péh-hoari en en des saiet en Eutru Corven, *Er Hás* (1) hag é ma ean é lakat é brehoneg. Epad ma filim hor spered get é larereh kaer, é teval en noz ar er mézeu. Adal demb é huélamb tosten Beaurieux, èl ur pikol lon gourvée, bodeo gué du-pod éh obér ur moué dehon. Devéhan splanndér en dé e hoari kuh-kuh émesk er bareu, ha tour en iliz, èl ur flem, e ia de doulein en èbr, deit de vout ru-tivl. Adreist en trohad ru-sé éh es ur viùennad splannoh hag e zalh, ur sted « silzigenneu » hag e vèhè laret stired kollet dehè ou splanndér. È pen er sted, ur stirem luhus e hra èl dèuein get en aùélig kloar a huéh adreist hor penneu.

A glei demb, en em-léd flagen en Aisne, biùennet doh en deu du get er gué haleg-mor hag e zistag azohté, ur uéh en amzér, èl get ké, dël aleuret dilézet get ou bar.

En ou mesk, é réd un trén bihan hag e rebours, trouzus, bouillardeu moged, e chom difinu un herrad, ar végeu er gué, èl grañiad guen ur pikol chapelet, dibunet get ur gigant dianat.

Kloar é en amzér; douz hasidrouz. Hag é vonet elsé, étré Bretoned, ér vro-man nen dé ket hon hanî, é komz ag el labour hor boë boulhet duhont aveit kloz hor bro-ni ha chomet é darn, é tamb, hep gout demb, de vout klouhañnek ha mut. En em-zisparti zo ret. Én hor haloneu en em-sil er velkoni e ounid kalon pep kadour, a pe zisken arnehon tioélded kevrinus ha spontus un moz brezé.

Perak éh omb-ni aman ?

(1) Aben a pe vo gellet, éh embanneemb péh-hoari-sé.

Buhé Dihunamb

MIZ MEURH

Komenandeu kollet : 6

Komenandeu neué : 12

Souramb !...

Er ré ne vennant ket mui guélet « Dihunamb » : En I. Penvern, Mañnéig, St Káradeg; beleg Le Guyader, St Stén; D' Thérèse Le Frapper, Losteng; J. M. Courtet, Kerglinieg, Penhesten; R. Merret, Karenteg en des rahuizet en dastumaden hep laret perak.

PROVEU

Kaset de « Zihunamb » get Breihiz gredus aveit harpein hol labour.

DD. :

D' Ezel, Douar'-n-énéz, 8 l.; beleg Le Clerc, Kemper-Guézenneg, 5 l.; J. Boulard, Lanngedig, 7 l. 50; D' G. Péresse, Lanndregér, 250 lur; beleg P. Nedelec, kelennour ér Hloerdi bras, Lesneven, 7 l. 50; D' M. J. Péresse, Roahon, 7 l. 50; Roger Grand, Aradon, 7 l. 50. beleg Gillet, alézonour, Pondi, 7 l. 50.

GIRIEU

NEN DINT KET ANAUET GET EN OL :

arzour : artiste	kadour : combattant
Aùen : La Muse	Keltia : Celtie
barnour : juge	kenùeñ : commerce
Brehoned : Brittons	kevredigeh : société
Breih-Veur : Grande-Bretagne	kevrinus : mystérieux
broadel : national	kloz : gloire
broadele : nationalité	komenandour : abonné
déuein : brûler	koun : souvenir
drem : fas	lu : armée
eigirlein : respont	pakret : tout à fait ressemblant
énebieh : hostilité	pih : avare
gouen : race	popineg : pépinière
gouiegeh : science	Saozon : Anglais
gourséet : azéet	sévenadur : civilisation
hendadeu : ancêtres	skeudenneu : illustrations
héson : harmonieux	talva : front de bataille
hevelep : mem	tivl : tuiles
Iuerhon : Irlande	tour-tan : phare

Aveit diskein guel er brehoneg; aveit diskein el lenn

hag er skriù, heuliet skol dré lihér DIHUNAMB.

Ne gousto nitra deoh.

LEH DE FERMEIN

MAR NE UÈLET KET MAT

PÉ MAR VENNET ARMERH HOU TEULAGAD



Kerhet de glask luneteu
de di

PROST

*Ha n'en des ken lunetour nameiton,
érr hornad-bro, guir arnodadet.*

8, ru St Pierre, én Oriant.

GUÉR A GEMENT SORD E ZO EIT SELLEU HIR PÉ
SELLEU BER, GUÉR ENEP D'ER VURLETEREH

PAPETERIE LE BAYON-ROGER

13, Place Alsace-Lorraine

EN ORIANT



*ne fariet
ket
a di*

Lévreu overen
Chapeteteu, Médaienneu
Statueu, Kristeu
Li.najeu a zévasion.

Treu, plu, papér ha pep tra eit er vugalé-sko^l
Lévreu ar er labour-doar ha réral

MOLLEREH

N'en des nameiti ag en hanù-sé
én Oriant.

*Lihérieu-kanveu, pédeu-skriù
ha pep sord mollereh gallek
ha brehonek.*

Lévrreg "Dihunamb"

Goulen el lévrre get : Editions de « Dihunamb » én Henbont. (C.C. 241.28, Nañned) hep kas argant. Merket e vo en délé ar gein golo él Iévr

	Mizeu kas ohpen.
A. GUILLEVIC et P. LE GOFF : Grammaire bretonne	7, *
Exercices	8, *
Vocabulaire breton-français et français breton	12, *
E. ERNAULT : Dictionnaire breton-français du dialecte de Vannes (sans le Supplément)	25, *
LOEIZ HERRIEU : Le Breton Usuel ar bapér Breiz : 20 l.; ar Japan : 50 l.	14, *
E. ERNAULT : Ar Groaz Doue, evit deski len brezonek ha latin (40 p.)	2, *
F. VALLÉE : Grand dictionnaire français breton (K.L.T.)	75, *
R. HEMON : Cours élémentaire de breton (K.L.T.)	12, *

LÉVREU ARAL

Dihunamb ! Biéadeu a oudé er pen ketan nameit 20 nivéren benak	500, »
L. HERRIEU : Chansons populaires du Pays de Vannes. Ur pikol livr 17×27 get en toñnieu, er brehoneg hag er galleg	36, »
Er Peizant (diviz)	0,25
En Eréun hag er Rozen guerz ered	0,65
Fest e zo, soñnenneu hoariet eit merhed	2, *
Er Bugul Fur (Molladen neuë kampennet get L. H.)	1, *
L. HERRIEU (Troidegeh) Prinsézig en deur Lévr karget a limajeu ,eit er vugale	5, »
Tud brudet hor bro-ni. Ur haer a lévr get ur golo ru ha du get R. Perrin	10, »
J.-P. KALLOH : Ar en deulin, brehonek brehonek - gallek	15, »
ABAD HÉNEU : Istoér Breih (378 paj. Golo skedennet)	20, »
Molladen ar bapér luéhus	12, »
Guéladen Tondal, béaj burhudus ér bed aral	15, »
Derdriù, pé lah mibion Usneh	6, »
Mab Azen, sorbiennue er bobl	9, »
Bourapied en Tiegeh, Sorbiennue Bourus	20, »
Er Graal Santél. Lévr burhudus diar Sakremant en Aotér (golo deu liù)	15, »
Sant Kolmkel. (pé kolomba). Buhé unan ag er Sent keltiek souéhusan zo bet	45, »
	17, *

Ankén en Nibelungen, Tennet a lénnegh goh Germania

Ribardenneu. Bourus de lénna

10, »

20, »

E. BERTHOU : Dihun Breiz, papéren da skigna emesk ar bobl. (16 paj.)	0,25
BREIZAD : Fontanella. Arvest brezounek gant F. Goyen	1, *
ABAD ER MAY : Zantez Barbon, pez-hoari	4, *
J. BULÉON : Histoér Santél	4,50
KLAODA AR PRAT : Buhez Arzur a Vreiz, pez-hoari	4, »
AR YEODET : Bleuniou Yaouankiz, Guerziou	10, »
ABAD ER BAYON : Fosfatin er vateh fin get er galleg	3, »
Saint Izidor... d°	3, »
Kado, roué er mor... d°	4, »
Nolüen... d°	4, »
Buez Louis Eunius, di jentil ha pech'her bras. Trajedien	5, »
Rol giriou ar Jabadao gant kan ar Jabadao	1, »
ABAD KADIG : En Est - Er Sauzoned - Golo Skedennet	4,50
T. BELLEC : Imitasion Jésus-Krist	5, »
ABAD OLIÉREU : En Aviél (skeudennet)	4, »
ABAD ER STRAD : Guerzenneu Breih-Izél. — Litorien-neu. — Soñnenneu — Guerzieu — Kafinéneu	11, »
Lévrig er Hristén, guerzenneu ar er relijon	8, »
L. AR BER (Ab Alor) : Sinatur an eil Testament. Pez-hoari	2,50
Ar gwir treac'h d'ar gaou	6, »
Ar verc'h he divrec'h mougn. Pez-hoari	1, »
ABAD KADOU : Jézuz de 12 vlé. — péh hoari	1, »
Sant Gonéri. — péh hoari	2, »
ABAD MARY : Foér Vériadeg (skedennet get Marzin)	4, »
— ar bapér grooit é Breih	10, »
JOB en DROUZ VOR : Ki ha kah	Péh hoari
— En Tri Kansort	d°
— Mab er Brezélor	d°
— Er Mèsi	d°
— Aveit Doué hag er Vro!	d°
— Diù farsaden ver	d°

1,50

2, »

3, »

2,50

3, »

2,50

3, »

1,50

LOEIZA ER MELINÉR : <i>Ar bont er velin. Sorbiennou</i>		
és de lénn, Skeudennet stank get R. Perrin	30, »	
4 ar un dro, aveit er skolieu	40, »	
GUILLAM ER BORGÑ : <i>Sorbiennou ha farseu koh er</i>		
<i>Hornad</i> (10 ton merchet)	5, »	
J. LAMOUR : <i>Bim-Bim-Mizér Guerzenneu deverrus</i>	1, »	
LÉVREU GALLEK		
MARTHE LE BERRE : <i>Le Vénérable P. Maunoir</i>	9,70	
L. PALAUX : <i>La Vie de J.-P. Calloc'h</i>	16, »	
H. DE LA VILLEMARQUÉ : <i>Barzaz Breiz</i> , (devéhan		
molladen)	30, »	
A. BRIZEUX : <i>Marie</i> , Edition « Les meilleures livres » ..	1,50	
C. DANIO : <i>Histoire de Notre Bretagne</i> . Ur haer a livr		
skedennet get Kreston	14, »	
JOS PARKER : <i>Le Clerc de Kerné</i> , roman	6, »	
Le Livre Champêtre, poésies	6, »	
K. AR PRAT : <i>Arzur a Vreiz</i> , trajedien	2,65	
G. GAUTREL : <i>Le Trésor des Douze</i> , romant gallek ar		
Breih de zonet	5, »	
L. HERRIEU : <i>La littérature bretonne depuis les origines</i>		
jusqu'au XIX ^e siècle	3, »	
ERNEST JOYNT : <i>Histoire de l'Irlande</i>	12, »	
C. LE MERCIER D'ERM : <i>L'étrange aventure de l'Armée</i>		
de Bretagne	(Le camp de Conlie)	30, »
F. VALLÉE : <i>Rapport du Comité de préservation du bre</i>		
<i>ton (1904-1905)</i>	1, »	
Petites industries rurales et locales	1,50	
Y. LE DIBERDER : <i>Bugul noz et loug garou</i>	2,25	
Pour le théâtre de Sainte Anne (arJapan)	3,50	
Collection de la Revue <i>Brittia</i> sur simili-Japon		
(rare)	50, »	
Collection <i>La Glorieuse Bretagne des Armées</i>		
(rare)	30, »	
J. LE FUSTEC : <i>Sous les pommiers</i> , saynète bretonne ..	1, »	

Comtesse de PESQUIDOUX : <i>Omnium. Romant ar skoïr</i>	
<i>Quo Vadis. Lod anhon e dremen é Breih, (Dérat)</i>	5, »
<i>Nominoé père de la Patrie</i>	1,25
L. LE BERRE (Ab Alor) : <i>Feurs de Basse-Bretagne</i> ,	
contes	5, »
<i>Les épousailles de Brébion</i>	5, »
<i>Le français de Quimper</i> (péh-hoari)	3, »
A. DE CHATEAUBRIANT : <i>La Gerbe des Forces</i> (Nou	
velle Allemagne)	21, »
P. MOCAER : <i>Régionalisme et Nationalisme</i>	2,50
<i>L'enseignement bilingue du Pays de Galles</i>	2,50
P. HEMON : <i>Les chouans dans les Côtes-du-Nord</i> (41 p.)	
(é nep d'er chouañned)	1, »
J. DE PLOUNÉOUR : <i>Bretagne d'aujourd'hui et Bretagne</i>	
de demain, péh hoari	1, »
BLEIMOR : <i>La Boussole bretonne</i>	0,40
J. CHOLEAU : Conditions des serviteurs ruraux	
<i>Voies ferrées et fluviales en Bretagne</i>	5, »
<i>Chansons et danses populaires de Haute-Bretagne</i>	
PAUL ALBERT : <i>La poésie</i> . Etudes sur les chefs-d'œuvre	
des poètes de tous les temps et de tous les pays.	
— Hachette. Keiniet get lér, golo lién. Aleuraj.	
Stad mat	15, »
<i>Le Réveil breton</i> , gazeten suhuniak Renet get A. Mellac ha	
L. Herrieu Bléad 1907 bet 1914; er bléad	20, »
Postkartenneu « Breizad da genta » en dousén	6 real
Postkartenneu <i>Ar en Deulin</i> (X. de Langlais)	0,25
En dousén : 10 r.	
Porteled J.-P. Kalloch	1,25
En dousén : 10 r.	
Drapoieu bihan Breih (ar bapér, get un troed)	
En dousén : 1 skoued.	0,25
A HENDARAL : Lévreu koh, ar zistaol. (Goulennet er rol,	
kaset de uélet eit 4 real).	
Gellout e hramb tennein, aveit hol lénnerion, kement	
lévr brehonek pé gallek e zo. N'ou des nameit rein demb	
chomléh en embannour.	
Obereu gallek neùé-flam, braù ha marhadmat : Châteaubriand,	
Brizeux, Le Sage, Noel du Fail, Andersen (skeudenヌ Yan'Dar-	
gent) Tristan Corbierre h. h.	

Mollet a neùé - so :

Lénnet mat :

Mar dé goanneit d'hou teulagad, pé mar dint bet bepred goann ;

Ma né uél ket mat hou pugalé hag é lakant ou lévreu tost d'ou deulagad eit lénn; mar en em-glemmant get en droug-pen;

Kerhet, a fians kaer, d'er *Central Optique*, 58 ru en Iliz, en Oriant (ru Mal Foch, breman) léh ma vo muzulet, hou kuéled ha reit deoh el luneteu e jaoj doh hou teulagad.

Tud kér ha peizanted

AVEIT EM UISKEIN HUI E GAVO É TI

LE BOURLAY, Kemener

24, ru Neùé én HENBONT

RAH EN DILLAD E HUES DOBÉR ANEHÈ
AVEIT GOAZED, KRENNARDED, BUGALÉ

RÉ GROEIT PREST-KAER, PÉ D'OBÉR DOH HOU KORV
DILLAD LABOUR « *LE MONT ST MICHEL* »; ER RÉ KRIU-
AN HAG, AR UN DRO, ER RÉ MARHADMATAN.

EN E. ER BOURLAY, UN DÉN AG ER VRO, E GONZ
BREHONEG.

**Embanneu “Dihunamb”
Zo talvoudus, ur bam !**

En eùéhour : L. HENRIO.

Mollereh *Dihunamb*, 13, tachen Alsace-Lorraine, en Oriant.